

KLEMVAN

DA VEZA KANET EC'HARZ TREID AR GROAZ ENN ZUR MISION.

—••••—
Ton : Gwelit, ma daoulagad.

Eur vouez.

**Gwelit, ma daoulagad, chetu maro Jezuz !
 Maro eo evid-omp, pec'herien gwalleurus.**

Ar bobl.

**Maro Jezuz 'vid-omp war vek menez Kalvar,
 P'ez kalon ne ranno gant keuz ha gant glac'har,
 Gant keuz ha gant glac'har?**

Ar vouez.

**Tosta, pec'her, ha deuz; sell-mad ouz da labour;
 Pep pec'hed ec'h euz gret zo ama torfedour.**

Ar bobl. Maro Jezuz, etc.

**D'ar Juzevien e vé? d'ezho n'hen tamal ket,
 Te'c'h euz roet dorn d'ezho, te'c'h euz ho zikouret.**

Maro Jezuz.

**Ec'harz he dreid, deuz 'ta da wéla da déchou,
 Ha sonch ez int bet kaoz demeurez he oll boaniou.**

Maro Jezuz.

**Mar d-eo rusiet he gorf gand ar gwad o redek,
 Te a dlé he welc'hi gant da zaelou dourek.**

Maro Jezuz.

**Evit skuilha daelou, evit touch da galon,
 N'ec'h euz nemet gwélet poaniou he basion.**

Maro Jezuz.

N'euz nemed eur gouli euz ann treid bete'r penn,
Kurunet eo gant spern, plantet bete 'n empenn.

Maro Jezuz.

He gorf zo dispennet, dihompret he izili,
He dreid hag he zaouarn treuzet gant tachou kri.

Maro Jezuz.

Gant ar c'hranch hag ar gwad he zremm zo dislivet,
Ha gant eur c'hoaf gruel he gostez digoret.

Maro Jezuz.

Pec'her ha pec'herez, te her c'hrucifii c'hoaz,
Ha da galon divad 'zo d'ezhan 'vel eur groaz.

Maro Jezuz.

Tud tear, tud buanek, tud bepred venjansuz,
C'houi zispenn c'hoas bemdez he gorf sakr da Jezuz.

Maro Jezuz.

Danserez ourgouilhuz, na rit nemet bragal,
Hag ar spern dizamant a blantit enn he dal.

Maro Jezuz.

Gwall deod, teod millighet, dre da gomzou mezuz,
Bemdez e kriez c'hoas : *krucifit Jezuz!*

Maro Jezuz.

Den gadal reuzeudik, dre da blijaduriou,
E lekez c'hoas bemdez korf Jezuz a bésiou.

Maro Jezuz.

Te ro c'hoas da Jezuz, o mesvier aheurtet,
Ar vestl hac ar gwin-aigr da derri e zec'hed.

Maro Jezuz.

Evid ho kervel c'hoas, he beun a zo stouet,
He galon zo digor, he zivrec'h astennet.

Maro Jezuz.

Distroit, distroit eta, o kristenien, ouz-in,
Hag ho pardon d'e-hoc'h oll joauz a aotréinn.

Maro Jezuz.

Ia, o va Jezuz, ranna ra hor c'halon,
Gant keuz ha gant glac'har e c'houlennomp pardon.

Maro Jezuz.

Pardon, va Doue, pardon euz hon oll bec'hejou!
Kentoc'h mervel eghet nevezi ho poaniou!

Maro Jezuz, etc.

AZEULIDIGHEZ D'AR GROAZ.

Ton : *Vexila regis*, 25.

M'hoc'h ador, o kroaz va Jezuz,
Ruz-glaou gand he wad prisiuz;
C'houi eo ar wezen a vuez,
Abeg euz va zilvidighez.

M'ho trugareka, va Aotrou,
Euz ho pasion hag ho poaniou,
Me garfé renta d'e-hoc'h ivez
Karantez evit karantez.

Allaz, allaz, na hellann mui
Beva, gant keuz ha melkoni,
E ken braz anken pa wellann
Map ann tad ha n'euz nemet-han.

Me, siouaz! a dleie mervel,
Ha nann ho map, Tad eternal;
Kastizet ez eo ar mestr mad
Evit he zervicher diyad.

Me fell d'in chomm da virviken
Ec'harz ar groaz gant Madalen ;
Evit gwéla ganti eno
Va fec'hejou hag he varo.

Va boëd a vezo he boaniou
Va evach ar vestl ha daelon ;
Va c'hambri a vezo he goztez ,
Da loja enn-han noz ha dez.

A greiz va c'halon me brotest ,
En despet da zatan , ounn prest
Da c'houzant pep merzerinti
Kent eghet dont d'he offansi.

Abalamour d'e-hoc'h , va Zalver ,
Me a zougo e peb amzer ,
A wir galon , va oll groasiou
Enn distaol euz va fec'hejou.

Enn enor d'ho kroaz e fell d'in ,
Va Jezuz , keid ha ma vevinn ,
Kaout he fatromm ato ghen-é ,
War va dilhad hag em éné.

Em zremenvan ra vezo c'hoaz
Jezuz em c'halon hac he groaz ,
Mervel etre divrec'h Jezuz ,
Eo mervel e gwir evuruz.



HUANADOU

AN ENE DEOL KENT A GOUDE AR GOMMUNION.

Ton : *O na hir eo an noz ! 66.*

Oh ! na hir eo an noz ! pegouls e teui an de ?

Ma 'zin da zighemer Jezuz , va c'harante.

Oh ! na hir eo an noz ! pegouls e teui an de ?

Dihun , sao 'ta , va c'horf , deomp da gavout Jezuz ,
Me glev , eus va gwele , he vouez karantezuz.

Dihun , sao 'ta , va c'horf.

Pegouls e vinn arru ! ô hent , na hir out-te ?
Var lein ho tiouaskel , eled , va doughit-me !

Pegouls e vinn arru , etc.

O va c'halon , digor , digor dre garante ;
Gweled a ran er fin ti ha palez va Doue.

O va c'halon digor.

O Ilis vennighet , digorit-din ho tor ,
Ma 'zin ebarz enn hoc'h da gavout va zenzor.

O Ilis vennighet.

Divar dreuzou ho ti , ô mestr bras euz ar bed ,
M'ho salud , m'hoc'h ador a gorf hag a spered.

Divar dreuzou ho ti.

Sperejou evuruz , oll zent ha sentezed ,
Zo en dro d'am Doue , m'ho salud gant resped.

Sperejou evuruz.

Tabernakl bennighet , digor , digor difre ,
Ma velinn va Jezuz , ma velinn va Doue !

Tabernakl beunighet.

Dre zaoulagad ar feiz, m'oc'h anao, va Jezuz,
Va C'hrouer, va Zalver, va mestr trugarezuz.

Dre zaoulagad ar feiz.

Disposit va c'halon d'ho kemer, va Doue;
Roit din feiz, esperanz, kreskit va c'harante.

Disposit va c'halon.

Deut eta, va oll vad, diskennit em c'halon,
Hag ennhi evit mad, diazezit ho trôn.

Deut eta, va oll vad.

Goude ar Gommunion.

M'ho talc'h, ô ma Jezuz, birvikenn n'ho laoskinn;
Mignon fidel ha mad, m'ho karo, tré veyinn!

M'ho talc'h, ô ma Jezuz.

O dousa karanté, ma Jezuz, pebez tan!
Petra viot-hu enn eny, pa'z oc'h ken dous aman?

O dousa karanté.

Skoazelliit ac'hanon, mond a rann da fata!
N'hellan mui n'em zerc'hel, ne badann gand ar joa!

Skoazelliit ac'hanon.

O poulzad dudiuz! na pélec'h emañ-mé?
Men ez a ma c'halon? nijal a ra d'ann ée.

O poulzad dudiuz.

Ma Jezuz a zo d'in, ha me zo tout d'ezhan,
Ne ket me eo a vev, hen eo a vev aman.

Ma Jezuz a zo d'in.

Em daol, kousk, ma c'halon, war galon da Jezuz:
Astenn a ra he zorn, he vrec'h karantezuz.

Em daol, kousk, ma c'halon.

Kemend zo war ann douar, ha kemend zo enn ée,
Deut da welet ar vad a ra d'in ma Doué.

Kemend zo war ann douar.

Mari, poull ma c'halon a zervich da wélé
D'ar map hoc'h euz doughet etre ho taou gosté.

Mari, poull ma c'halon.

Pellaït oll, pellaït oll, ah! list-hen da gousket :
Arzaoït em c'halon, ô ma oll euruzded!

Pellaït oll, pellaït oll.

Deut ghen-en, ma Jezuz, deomp hon daou a gosté,
Pell dioc'h safar ann dud, ne vo meid hoc'h ha me.

Deut ghen-en, ma Jezuz.

Komzit d'in, ma Jezuz; komzit, ma c'harante,
Komzit, ha deskit d'in ober ho polonté.

Komzit d'in, ma Jezuz.

Grit, ma Doué, ne glaskinn, ne garinn nemed hoc'h,
Ha ma vo dé ha noz ma oll zonzou enn-hoc'h.

Grit, ma Doué, ne glaskinn.

Kenavo, va Jezuz, va c'horf a ia d'ar gher;
Kenavo, va Jezuz, kenavo, va Zalver!

Kenavo, va Jezuz, va c'horf a ia d'ar gher.

